

## Itron Gwerc'hez Kervaria

Ton: Gwerz kozh Sant Erwan Sellout ouzh

<https://sites.google.com/site/soneriendavikenconfrerie/gwerz-cozh-sant-erwan>



### Itron Gwerc'hez Kervaria

**Karget a levez a joa,  
D'ho pugale reit o Mennad,  
Ni ho ped, Mari o Mamm Vat.**

Kaer e oa gwechall ho chapel  
Kaer 'vel kalon an dud fidel  
A deue amañ d'ho pediñ,  
Dirakomp 'mañ an testeni.

Heñvel ouzh Sent, pirc'hirined  
D'ar chapel-mañ zo deredet  
Piv\* lâro an niver dioute ?  
Mari hepken, Mamm an aelez.

Kement a dud hag a ya c'hoazh  
Da Wengamp dindan ar gwez glas,  
Amañ vez gwelet war an dro,  
Deu(e)t eus kant parrez tro-war-dro.

Mari a gleve o fedenn,  
De(zhe)\*\* holl e roe o goulenn,  
Darn 'vit ar c'horf, darn all ivez,  
Bede Mari 'vit an ene\*\*\*.

Kristenien, gwelet vezo c'hoazh  
en hon amzer mui 'vit biskoazh.  
Gwerc'hez karet Kervaria  
o kargañ ac'hanomp a joa

\* *distaget* “*piv*” (*mod Plouha, 1 silabenn*)

\*\* *distaget* “*Dé holl*”

\*\*\**distaget* “*ine*”